



Ar Halvar-mañ e-neus kaset ar vrud euz Plougastell dre ar bed oll.
En-dro dezafñ hag en e enor eo bet savet Bleun-Brug Leon 1959.

BLEUN-BRUG

Niv. 120 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GWENGOLO - HERE 1959

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, ouré Saint-Renan (Fin.).**
Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Dibenn-eost , gand L. B.	1
Prezegenn B. B. Langonned , gand an Ao. Kerveadou.....	2
Bleun-Brugou 1959	4
Prizioù kenta B. B. 1959	9
Skritellou brezoneg Langonned	10
Skol-hañv ar B. B. e Brest	11
Ar verienenn , barzoneg gand V. S.	15
Keleier	16
An dastum sivi , gand O. Kervella	18

On Aluzenner meur nevez.

An Ao. *Chaloni Falc'hun*, dalhet pell diouzom en abeg d'e yehed, e-neus kavet gwelloc'h rei e garg a aluzenner meur ar Bleun-Brug, d'eur beleg all.

An Ao. *Chaloni Mevellec* anavezet mad gand an oll en emzao breizeg, eo a zo bet anvet gand an Ao. 'Eskob Fauvel da gemer e blas. Ra vezo trugarekeet an Ao. Falc'hun evid e labour vad ha ra gavo amañ an Ao. Chaloni Mevellec or gwella gourhemennou doujuz ha breizeg.

Bennoz Doue d'an Ao. 'n Eskob Fauvel da veza roet deom an Ao. Mevellec.

Or Chaloni nevez.

Eur helou laouen all a zeu deom. An Ao. *Bleunven*, person Lokournan-Leon, ha rener ar gelaouenn « Bleun-Brug » a zo bet anvet da chaloni a enor. An oll Vleun-Vrugerien a vo laouen a gement-se. Or gwella gourhemennou d'ar chaloni nevez.



133869

dibenn-eost

Ema dizro adarre dibenn-eost, an diskar-armzer, ar mare, war ar mêz, da beurgloza drevajou an douar, hag, e kêr, ar mare da beb hini da glask e lajeiz evid kregi a-nevez gand al labour.

Kosa den a zo n'e-neus ket gwelet, moarvad eun hañvez ken dudiu hag an hini on-eus bet an eurvad da gaoud er bloaz-mañ.

Da Zoue, Mestr ar bed, hag a oar digas deom, beb eil tro, doan ha levez, eo dleet meuleudi ha bennoz !

Ar bombezennoù daonet, a lavare ar re goz, o-deus distreset a-grenn an amzer ha troet penn d'ar vaz... Ha padal on-eus bet sizunvezioù dispar, deizioù brao, heol tomm kement m'or c'hoantaem.

A-vriad eo e-neus an heol benniget taolet ha strewet war beb tra e splannder hag e laouenidigez : war eost ar parkeier, da genta, a zo bet eun eost puilh ; war gouelioù ha pardonioù or bro o-deus gallet en em zispaka en o sked hag en o haer.

Morse gouelioù ar Bleun-Brug n'int bet eet ker brao ha ken mad da benn. Heb ober fae na c'hoantaad krenna talvoudegez ar gouelioù keltieg o-deus bet ive kemend a lufr, er bloaz-mañ, e Leon, Treger ha Kerne, hag o-deus kavet e-leiz a gazetennou d'ober o meuleudi, e kredo lavared amañ eo bet gouelioù ar Bleun-Brug ar re zounna ha frouezusa, ar re a zo eet ar muia beteg kalon hag ene an dud, o-deus bet gwir berz enno.

An hini a oar :

« Lakaad ar mad hag ar brao d'en em gaoud
D'hennez eo da genta, beza perhenn d'ar maout. »

Evel-se eo e lavare ar Hresianed, gwechall, kenta pobl euz ar bed evid ar pezh a zell ouz ar spered hag evid ar pezh a zell ouz ar garantez a zo dleet d'ar vro.

Lakaad ar Vretoned, mezevellet re aliez gand kinkladurioù ar hêrioù braz, da zizelei ha da brizoud ehonder pinvidigezioù o Breiz, lakaad gwrizioù karantez Doue ha karantez Breiz d'en em douezia ha d'en em skoulma muioh-mui en o halonou, setu ar pezh a venn ober ar Bleun-Brug, setu ar pezh o-deus klasket ober ar gouelioù kaer, bet aozet, e-pad an hañv diweza.

Lennit kentoh !

L. B.



Prezegenn greet e Bleun-Brug Langonned gand an Aotrou chaloní Kerveadou

Superior kloerdi braz Gwened

Feiz on tud koz

*Evel on tud koz ken nerzuz
Ni vo kristen, beo ha maro.*

AOTROU 'N ESKOB,
TUDCHENTIL MEUR,
MA BREUDEUR,

Klevet e ve tud o lared : « Ar Bleun-Brug a zo eur gouel kaer sur a-walh ;
mez ne deuo ket a-benn da zigas beo en-dro traou a zo maro diboa pell 'zo pe
a zo o vond da vervel, e-giz an dilhad mod koz, ar haniou hag an dansou gwe-
chall ; ar brezoneg memez a zo o vond da vout koll. »

Pegen trist e vefe Breiz-Izel, or bro, en devez e vefe henvel ouz ne vern
pesort bro !

Mez, kement-se, ma breudeur, ne zigoueo ket, dre hras Doue, ha gand sikour
Breiziz chomet stag ouz an teñzor laosket dim gand on tud.

Amañ, e parrez Langonned, ha tro-war-dro, eo eur blijadur gweled tud
yaouank, paotred ha merhed, ken fier euz oll ar'pez a ra enor d'or bro.

Dalhet, ma breudeur, dalhet stert ha diwallet mad gizioù koz ha yez kaer
Breiz-Izel. Bodet oh amañ hirio evid kement-se, hag evid lared dirag an oll
ho karantez evid ho pro. Or Zalver Jezuz-Krist ive, hag ar Werhez Vari, o-deus
karet o bro. Oh ober kemend-all, ne ram eta nemed heuli skouer Or Zalyer.

Mez, er mintin-mañ, e-pad an overn-bred, dirag an aotrou 'n Eskob, eun
dlead eo ive 'vidoum lared deoh :

Chomet ive, Breudeur karet, evel ho tadou koz, tud a feiz, kristenien kreñv
ha nerzuz.

Or bro-ni a zo bet savet gand ar zent. Kement-se a zo e-barz istor or bro.
Ar wirione a zo ar wirione, ha den fur ebed na hell nahi ar pez a zo ar wirione.
E-gizton-me, lennet ho-peus digwener, e-barz ar journal, eur pennadig euz
istor parrez Langonned. Bout a zo bet er barrez-mañ diou abati ! Unan a zo
bepred en he zao. Anaet mad eo gand an oll. Nen deus ket mui enni meneh
gwenn digaset eno gand Sant Bernard. Mez miret e ve en he chapel lod euz
relegou Sant Moris a oa bet he hentan Abad. Pegement a vad e-neus groeit ar
meneh-se, er hornad bro-mañ betag an devez emant bet kaset kuit dre ar
lezennou digristen ! Bremañ c'hoaz, ni a anav ar vad groeit gand Tadou ar
Spered Santel, misionerien en Afrik, a zo hirio e Abati Sant-Moris.

Mez n'eo ket an abati-se a oa an hini kosan e Langonned. Amañ, a-rôg n'oa
bourh ebed, e oa eun abati all (9^{va} kantved). Lod euz an iliz-parrez-mañ a zo
bet savet gand meneh an abati-se. Ar meneh-se a oa deit euz Landevenneg
hag a oa meneh du. Chetu perag e veze groeit ouz an abati, an abati zu.

E parrez Gourin, en eur gêr, anvet Lan-Zent, ez eus c'hoaz eur chapel en
enor da Zant Gwenole. Taol chanj e oa eno ive eun abati all.

Ya, ma breudeur, ne vern trezeg pe gornad a zellfeh euz or bro, chwi a
gavo roudou ar zent. E gwirione, ar zent neus lusket or bro Breiz-Izel ;
groeit o-deus anezi eur vro kristen. Savet o-deus enni ilizou ha chapelioù,
niveruz ha kaer, gand tourioù dantelezet.

Gand Loeiz Nihuellou, beleg euz parrez Gwiskri, e karfen lared deoh :

*« Karet ho chapelioù ! Emant e pep karter
Eun digemer zantel eneb arnou ar bed ;
Evel eur biz, o zour, pe ihuel pe dister,
A zav ho taoulagad war-zu bro an Eled ! »*

Evel tourioù or chapelioù, or zent koz a ziskouez dim hent ar baradoz. An
hent-se a zo hent ar feiz.

*« Feiz on tud koz, o feiz santel,
C'hwí 'vo bepred feiz Breiz-Izel. »*

O chom leal da feiz on tadou, d'ar feiz prezeget dim gand or zent koz, ni
a jomo leal da Zoue, leal ive d'or bro Breiz-Izel, pegwir, egiz em-eus laret deoh,
or bro a zo bet groeit gand ar Zent. Or bro, Breiz-Izel, a vo kristen, pe ne vo
ket mui Breiz-Izel. Kroaz Or Zalver Jezuz-Krist a zo bet savet gand on tud koz
tro-war-dro en or parrezioù. Dalhom ar hroazioù-se en o zao ; mez ive, ma
breudeur, kendalhom da gared ha da adori evel on Doue Or Zalver a zo stag
outi.

Pedom or zent koz,
Sant Moris ha Sant Gwenole...
Sant Herve hag ar re all ;
Pedom ive Santez Anna
Hag ar Werhez gloriuz Vari.

Ra virint don en or halonou ar feiz hag ar garantez. Karantez evid Doue,
karantez evid or breudeur, karantez evid Breiz.

*« War ho pugale karet, o Mamm dous ha tener,
Taolet eur zell a drue, eur zell leun a zouster ;
Or miret e peb amzer, ha goude o maro,
Kaset oll ho Pretoned d'an Nenvou o gwir bro. »*

Evelse re vo groeit !



Eur fazi e niverenn diweza Bleun-Brug :

Setu poz diweza ar varzoneg : « Bleuniou » gand V. S. war pajenn diweza ar
gelaouenn :

Bleunvennig koant diere
D'ar mammou war o barlenn
Lakët gand Doue.

Bleun-Brugou 1959

Bremañ p'eo tremenet goueliou an hañv, e vo êsoh deom teuler warno eur zell dre vraz.

Estreged ar Bleun-Brugou, ped gouel breizeg on-eus bet ?

Diez e ve o niveri. Koulz lavared heb sul ha heb gouel ez eus bet unan.

Darn a lavaro marteze, gand dispriz : «goueliou folkloreg ! Da betra e talvezo kemend-all a wiskamañchou hag a zañsou evid amzer da zond or Breiz. »

Eveljust, kement-se n'eo ket a-walh. Koulskoude, kemend-all a lufr roet gand ar goueliou-se da Vreiz, a zigor an daoulagad hag ar sperejou, a laka meur a hini da brederia, a grou eun aergel'h a du gand Breiz ha kemend a zell ouz he amzer da zond.

Da skouer, ne gaver mui, evel a-raog ar brezel, eun den e karg a gredfe lavared, dirag an oll, beza a-eneb ar brezoneg er skol.

Niverusoh niverusa, end-eün, e teu da veza ar goueliou a ya pelloh eged ar folklor.

Gwelet on-eus goueliou Kemper, kaerra goueliou folkloreg a zo hirio er béd, o sevel stard a-uz d'an dansou ha d'ar biniou, hag o houlenn kreñv ma vo digoret ar skoliou d'ar brezoneg, ha kement-se en ano 11.000 a re yaouank bodet er helhioù, bagadou ha lazou-kana.

Eun nevezenti vraz a zo aze hag he-deus kalz pouez. Ar wech kenta eo, marteze, e istor or Bro, ma weler ar bobl he unan, o sevel kreñv he mouez, hag o houndrouz mond pelloh, ma ne vez ket selaouet. Dond a reer da gompren e reer goap ahanom, hag eo eur vez ruz deom soubla da gemend-all. Eur zouez eo bet ive d'an estrañjourien ken niveruz e Kemper, gouzoud e reer ouzom skouarn-vouzar ha ni o houlenn hepkén, evid or brezoneg, ar gwir da veva war muzelloù or bugale, eur gwir ha ne vez nahet ouz poblou all, gand bro all ebéd dre ar béd.

Daoust hag e hortozet ma vo peurvaro or yéz evid selaou or mouez ?

Goude goueliou Kemper ar memez galv a zo bet klevet e Brest, Moutroulez, Konkerne Gwengamp...

E Montroulez zokén, unan euz kuzulierien ar gomun a zo eet beteg rei e zilez o veza ma 'z eus bet nahet outañ rei da gleved ar galv diwar prenest-pondale an ti-kêr.

E Montroulez hag e Gwengamp ez eus bet gelllet lenn e-leiz a skirdou peget war ar mogerioù pe skrivet war an heñchou o houlenn ar brezoneg er skol ha labour d'ar Vretoned e Breiz. Ma lavaran kement-mañ, n'eo ket evid didamall, med evid diskouez e laker c'hoervoni hag imor da zevel e kalon eur bobl o vond a-eneb d'he goulennou reisa. D'on renerien eta da zigeri o daoulagad.

**

Distroom war ar Bleun-Brug. Anezañ eo e fell din komz.

Azlavared a ran eur wech muioh ez eo ar Bleun-Brug estreged goueliou folkloreg. Ma ne vije bet nemed kement-se, abaoe pell 'zo on defe e lezet da goueza.

Méd, dalhom soñj, ar Bleun-Brug a labour euz penn kenta ar bloaz d'egile. Evid lakaad tro e rod ar Bleun-Brug, e ranker kaoud estreged êr an amzer. Al labourioù buro a zo braz ha dispignuz : Milierou a liziri da respont. Milierou ha milierou a arhant laket e timbrou ; liziri-kel'h a verniou, ha pakadou post hag all diouz an druilh.

Ouspenn, ema or zekretour-meur, dalhmad war an heñchou, o weladenni ar skoliou, o rei prezegennoù hag abadennou dre Vreiz-Izel a-bez euz

Pont'n-Abad da Zant-Brieg ha Brest da Wened. Ober a ra heb bloaz war-dro 25.000 km. N'eo ket gand dour mor na dour gwern eo ez a, siwaz ! e gar-dredan en-dro, med gand esañs hag a goust kër !... Ha da heul, péd ha péd dispign all !

Kompren a dlefer eta, e rankom kaoud arhant euz eun tu bennag evid lakaad tro e rod ar Bleun-Brug.

An arhant-se, evid eul lodenn vad, a gavom dre ar goueliou a zavom. Ne lavaran ket avad e vefent oll gouniduz evidom. Er bloaz-mañ, anéz Bleun-Brug Plougastell, e vije bet chomet or hef gwasoh eged goullou.

Dond a ra deom ive, a drugare Doue, sikourioù, a-gleiz hag a zehou. Hag amañ, om laouen braz da helloud trugarekaad a wir galon, an Intron a Rohan-Chabot ken brokuz en or heñver. Bennoz Doue dezi !

Re nebeud a zo, avad, o kompren talvoudegez labour ar Bleun-Brug. Anéz, kanchou a dud eo a zeufe war or zikour, hag leh beza unan hepkén o labourad war ar skoliou, e vije daou pe dri.

C'hweh kant skol a vije da weled heb bloaz. A-veh ma vez gwelet kant pa n'eus nemed unan d'o gweladenni.

C'hwï hag a lenn kement-mañ, ha digeri a reoh ho kalon d'ar galv a gasom beteg ennoh ?

**

Eun digarez all on-eus, kalz pouezusoh, da zelher d'or goueliou.

N'eo ar goueliou-mañ evidom, nemed eun doare da ziskouez al labour brezoneg greet ganeom e-doug ar bloaz penn-da-benn. Ar goueliou a zavom a zo evidom evel ar frouez euz al labour-ze.

Goueliou ar Bleun-Brug a zo eun digarez deom da lakaad or mistri hag or bugale da gemer perz er henstrivadegoù brezoneg : *lenn*, *kana*, *displega*, dreist-oll. Evid ar skriva ne da ket ken koulz. N'eus nemed ar Bleun-Brug oh ober kemend-all.

E Bro-Leon, an traou a ya en-dro, mad kenañ.

E Plougastell ez eus bet 463 *bugel* o konkouri a unanou evid al *lenn*, an *displega* hag ar *han*, ha 32 *strollad* a 445 *bugel* o konkouri evid ar *han*. Eur blijadur e oa, diouz ar mintin, gweled ar vugale oh erruoud e Plougastell, a garradou euz 43 *skol*.

Evid dond a-benn euz kemend all a genstriverien e oa bet savet 11 *jury*, dindan renerez an Aotrou Chaloni ar Ster, iz-rener an deskadurez en eskopti.

Evid bihannaad niver ar genstriverien e Plougastell ez oa bet a-raog, daou Vleun-Brug-Skol e *Lanniliz* hag e *Ploueskad*, war-dro 700 a vugale o kenstriva enno, etrezo o daou, gand eun abadenn vrezoneg da heul, el leh ma oe klevet ar ganerien hag an displegerien wella.

Koulz e Lanniliz hag e Ploueskad, sal ar patronaj a oa leun-kouch a vugale o heulia gand eur blijadur eston an abadenn vrezoneg penn-da-benn.

O weled kemend-all, eur person a lavaras din : « Biskoaz kement-all !... Tregont vloaz 'zo, biken n'on dije bet gelllet ober kement-se ! ». Setu hag a ziskouez an araokadenn vraz greet war an dachenn-ze.

**

E Kerne ne da ket ken koulz an traou.

Edom er bloaz-mañ, en eur vro, el leh ma n'ez eus bet biskoaz Bleun-Brug ebéd. Eun dachenn nevez eta, el leh m'ema ar brezoneg komzet pellig awalh diouz ar brezoneg skrivet.

En eur zibab *Elliant* evid Bleun-Brug Kerne 1959 e felle deom ober eun taol-esa.

Deuet eo da vad. Rag ar skoliou o-deus asantet lakaad o bugale da genstriva, o-deus diskouezet n'eus netra aze dreist galloud bugale Kerne-Uhel. Meuleudi

dreist-oll da skoliou *Elliant* ha *Sant-Ivy*, med ive da skoliou Kerfeunteun, Fouenant, Coray, Brieg.

Eur hant a vugale evid eun taol-êsa, n'eo ket fall tamm ebéd, ha se en eur mare diêz, pegwir e oa dija ar vakansou.



Er Morbihan eo bet greet ar Bleun-Brug e *Langonned*. Muioc'h emañ amañ e Kerne-Uhel ive, eged e Bro-Wened. Eun dachenn nevez adarre dirazom. Danvez ar honkouriou a zo bet koulskoude kanaouennou ha displegadennou Bro-Wened, eun tammig diêz evid bugale ar vro-ze.

Daoust da-ze eo bet mad an traou. War-dro 200 a vugale, merhed dreist-oll, o-deuz kemeret perz er henstrivadegou : displega ha kana hepken.

Ar wech kenta eo da Vro-Wened da gaoud kement a genstriverien. An dramañ eo frouez skol-hañv Santez-Anna-Wened, warlene. N'eus bet, siwaz ! nemed skoliou Seurezed Kermaria o kas deom bugale ha skol Langonned dalhet gand Seurezed Sant-Joseph a Gluny. N'eus ket da veza souezet pa zonjer ez oa e skol-hañv Santez-Anna ouspenn 30 leanez euz Urz Kermaria. Renerezed an Urz-mañ o-deus komprenet, e gwirionez, an dalvoudegez a heller da denna, evid ar vugale, euz kement tra a zell ouz Breiz. Ablamour da-ze, o-deus bet kaset adarre da Skol-hañv Brest, er bloaz-mañ, ugent euz o leanezed ha kalz anezo, kelennered klasou uhella o skolachou. Peur avad e vezint heuliet gand an oll urziou all a ra skol e Breiz-Izel ! Da hortoz e heller lavared meuleudi da Gernaria, ha goulenn ma vezint benniget gant oll Zent Breiz.

Gwenediz a zo kanerien dispar, setu perag ez eus bet e Langonned eur genstrivadeg Lazou-kana o tond euz Lokmine, ar Faoued, Trussac, Pontivy, Lanvenegen, Etel, Pluvigner, Meslan.

Eur genstrivadeg all, plijuz kenañ e sell ouz ar yez, a zo bet greet c'hoaz e Langonned : eur honkour *skritellou* da lakaad ouz an tier ; hag ez eus bet 32 ti er vourh o kemeret perz er honkour-ze. Kavet e vo amañ warlerh an oll skritellou bet lennet ganeom war an tiez. Darn anezo a zo renket brao ha leun a spered.

Setu greet ganeom, evid ar henstrivadegou, tro an tri Vleun-Brug on-eus bet e 1959 : Plougastell, Elliant ha Langonned. En eskopti Sant-Brieg, siwaz ! n'eus bet Bleun-Brug ebéd er bloaz-mañ.

Bez on-dije c'hoaz gellit komz euz ar honkour tresadenou (dessinou), a zo bet heuliet ive gand eur bern bugale. N'e-neus ket hemañ, avad, kement a dalvoudegez, evid ar pez a zell ouz ar yez. Kredi a reom koulskoude n'eo ket didalvez evid ar pez a zell ouz Breiz.



Eun abeg all, ha n'eo ket an hini bihanna, on-eus c'hoaz da zelher da houe-liou ar Bleun-Brug.

Goueliou ar Bleun-Brug a zo goueliou kristen. Deuet int da veza pardonioù kaer ha breizeg, el leh m'on-eus tro da implija ar brezoneg evid ar sarmonioù hag ar hantikou en iliz, ar pez a dlefe beza eur skouer evid ar parrezioù, ha kement-se e-neus evidom eun dalvoudegez vraz.

Kredi a reom, en eur ober evel-se, plijoud d'ar bobl. Beñ bloaz on-devez diganti testenioù splann, evel ar vaouez oajet-se, o lavared deom warlerh an overenn-bréd e Plougastell : « Bremañ e hellan mervel, rag biken ken ne welin na ne glevin e brezoneg netra kaerroc'h ».

Eur rann-galon eo da galz tud (a-walh eo mond dre ar mezioù, evid her hleved) gweled ar galleg o kemeret ar plas a-béz e kadorioù prezeg an ilizoù ! Ha petra da zofjal euz ar hantikou hag a blij kement d'an dud, zoken da dud ar herioù ! Peseurt digarez a zo, me her goulenn, d'o lezel bepred a gostez ?

Da vihan, ar Bleun-Brug a gendalho, dre e houe-liou, da rei da glevet d'ar gristenien niveruz a gar c'hoaz ar brezoneg, kelennadurez an Aviel er yez a gendalh da veza o hini sul houel ha bemdez.



Petra eo bet goueliou Bleun-Brug 1959.

Plougastell, Elliant, Langonned ! Chom a raio an tri leh-se garanet don e sperejou ar re a zo bet enno da geñver ar Bleun-Brug.

Bleun-Brug Plougastell d'ar 14 a viz Even eo bet, a-dra-zur, an hini ar muia darempredet : eur mor a dud, e gwirionez.

Koulskoude, eun tammig poan a zo bet ouz e zevel, ablamour d'ar zofjal fall bet lezet er barrez gand Bleun-Brug 1936. Tud 'zo o-deus klasket profita euz kement-se evid ober droug da Vleun-Brug 1959. C'hwitet avad o-deus war o zaol. En despet dezo peb tra a zo bet kaer dispar. Diwar dreuzou ar Baradoz an Ao. Perrot e-neus gellit tridal ganeom oll, a drugare Doue.

Renet e oa ar homite gand eun den a-benn hag a youl : an Ao. Roparz. An Ao. Person ive hag e gureed, en o gwir wella, o-deus gouezet lakaad loh er barrez. Sent an eiz chapel a zo bet douget gand o zud, gwazed, merhed ha bugale, gwisket en o haerra. Biskoaz den beo ebéd n'e-neus bet gwelet kement a wiskamanchou plougastell : bro ar sivi ruz, en deiz-se, a oa deuet da veza eul liorz marellet a vleunioù kaer.

Hag an overenn-bréd 'ta, kanet gand kanerien Lokournan, Landi ha Plougastell ! Eun ilizad tud o tridal gand ar bedenn hag ar han, hag ive gand prezegenn vrezoneg an Ao. Bihan, person Plougasnou.

Da 14 eur 30, en eur park, e-kichen chapel ar Feunteun-Wenn (eun tammig pell diouz ar bourg, hervez darn) an abadenn a zo bet plijuz kenañ, dreist-oll ar « jeu scénique » hag ar brosesion, gand bennoz ar Zakramant diwar horre ar Halvar.

Ar « jeu scénique » renket gand Yann ar Barz ha Visant Seite, a zo bet c'hoariet gand tud ar barrez hag ar parrezioù diwar-dro : Dirinon, Loperhed, Daotilas, Sant-Divy, Lannurvan, Irillac, An Hospital, Logonna, Plougonvelin, Plougerne, Plabenneg, Gouesnou, Gwiseni, ar Releg... ha Sant-Nouga, e-keid ha ma klevet heb ehan, koulz lavared, kanaouennou, diwar muzelloù kanerien vrudet Landi, renet gand an Ao. Abjean.



Bleun-Brug Langonned, d'an 21 a viz Even, a zo bet disheñvel tre. E-leiz e oa amañ a wiskamanchou gwenedeg gand 31 a gelhioù, bagadoù ha lazou-kana. Ar vourh a oa kinklet dispar gand e skritelloù brezoneg, treh da Blougastell.

An iliz koz, lodennou anezi, marteze euz an naved kantved, a oa re vihan da zisheolia an oll dud, koulz lavared oll gand gwiskamanchou breizeg. Sarmon vrezoneg, dirag an Ao. 'n Eskob Bellec, gand an Ao. Chaloni Kerveadour superior Kloerdi braz Gwened. Eno edo ive renerien an deskadurez kristen en eskopti.

Goude ar préd e oe eun amheuliadeg hir dre ar vourh gand ar strolladoù breizeg, evid mond da bark ar c'hoariadegou. Eno e oe e-doug teir eur koroll son ha kan.

An Aotrou Ihuel, depute ha rener Kuzul-Meur ar Morbihan a lavaras eur ger c'hweg, e brezoneg, da veuli, da zivenn or yez, ha da erbedi ar gest.

Ar brosesion vraz, evid kloza gand bennoz ar Zakramant dirag an iliz, eo bet, moarvad, an dra gaerra euz Bleun-Brug Langonned.

Plijuz ive, ar mor a zonerien a reas goude tro ar vourh gand eur bern a zañserien ouz o heul.

Eur gouel d'eread, eur gouel kaer hag a ra enor da Vreiz. Meuleudi d'an Ao. Person, d'e gureed, d'an Ao. Puill, rener ar belh keltieg, d'an Ao. Burgeot, aluzenner B.B. Gwened ha d'an Ao. Derian.

Echuom gand Bleun-Brug Kerne, en *Elliant*, d'ar 5 a viz Gouere.

Elliant ! eun iliz kaer e-kreiz eur vered vraz, war-horre eun dorgenn, en eur vro dudiuz. Emaom amañ e bro ar veleniked. Tud hegarad, leun a volonteiz vad, lorch enno gand o 'farrez, o gizioù, o gwiskamanchou.

Laket o-doa en o 'fenn sevel d'ar Bleun-Brug, ar haerra euz ar goueliou. Kaer-kenañ o-doa kinklet ar vourh, entanet m'oant bet gand o 'fastor an Ao. Chaloni *Ollier*, person ar barrez, an Ao. *Bernard Kergourlay*, kuzulier-meur, hag an Ao. *Kergourlay* m'ar gomun. Petra 'helle harpa ouz tri dén euz ar seurt-se !

An overenn-bréd, kaer evel hini Plougastell, beo evel hini Langonned, a oe prezeget gand an Ao. Chaloni Cotten, bet superior e Kloerdi-braz Kemper, en eur brezoneg flour evel ma oar distaga Kerneviz.

Ar hoariadeg, goude merenn, e goueled traonienn ar Yed, kaerra leh a oufed da weled, a oe eun dudi penn-da-benn : koroll, son ha kan er penn kenta, hag eur « jeu scénique » evid échui, da zigas ar brosesion vraz, prosesion parrezioù Kerne.

En abeg d'an amzer a oa tomm spontuz, n'eus ket bet e *Elliant* kement a dud hag e Plougastell. Labourioù ar piz bihan o-deus ive mired ouz re all da zond.

Pa n'oa ket eun engroez re vraz, èsoh a-ze n'eo bet kén ober traou kaer. Taolenoù ar « jeu scénique » en em zispake m'oa eun dudi, war an draonienn hlaz : daouzeg taolenn : Bro ar Veleniked, Breiz ar mor, Breiz an douar, Breiz al labour, Breiz ar boan, Breiz al levez, Breiz ar Zent, Breiz ar Werhez, Breiz ar pardonioù... Taolenn Bosenn *Elliant* a skoas meur a hini... Taolenn ar vugale ive, kement anezo en o dilhad kaerra o kana hag o displega. — An oll daolennou-mañ a zo bet disploget gand *Elliant*, Tourc'h, Sant-Yvi, Coray, Landudal, Ergue-Gaberic, Langolen, Leuhan, Tregourez, Rosporden, Bannaleg... eilet gand kanaouennou Laz-kana Plougerne, e-noa ive kanet an overenn bréd.

Eun toullad mad a bennoù braz a zo bet deuet da enori hor Bleun-Brugou : eskibien, deputeed, senatourien, amiraled, vikeled-vraz, personed, renerien a beb seurt... E nebleh ne 'zeus bet muioh eged e *Elliant*, ha se en abeg d'or mignon *Bernard Kergourlay*.

Bennoz Doue dezo oll, dreist pep tra d'an Ao. 'Eskob Fave da veza renet Bleun-Brugou Plougastell hag *Elliant*, ha d'an Ao. 'n Eskob Bellec da veza renet Bleun-Brug Langonned.



Prizioù kenta Bleun-Brug 1959

Plougastell.

Kana (re vihan) : Mari-Pierre Foricher, Plougerne, ha Remy Guével, Plabenneg.

(Re grenn) : Anna Pennarguéar, Plougerne, ha Per Bervas, Gwiseny.

(Re vraz) : Tereza Kervella, Plougastell, hag Herri Jezekel, Sant-Derhen.

Displega (re vihan) : Annaig Arzur, Plougerne, ha Jean-Yves Charreter, Tregionou.

(Re grenn) : Rozali Fily, Gwiseny, hag Yves Abalea, Gwiseny.

(Re vraz) : Anna-Mari Le Roy, Plougerne, ha René Crenn, Landivizio.

Lenn (re vihan) : Monig Tanguy, Kerniliz, ha Marsel Le Roux, Plougar.

(Re grenn) : Helena Bourhis, Loperhed, ha Michel Urien, Plouenan.

(Re vraz) : Mari-L. Roue, Plougar, Yves Pronost, ar Grouaneg, hag Hervé Roua, Kleder.

Strolladoù kana : (merhed b'han) : 1. Kleder ; 2. Ploueskad ; 3. Plougoulm. — (Re grenn) : 1. Kleder ; 2. Landunvez ; 3. Plougastell. — (Re vraz) : 1. Lesneven ; 2. Kleder ; 3. Loperhed.

Kan pobl — 1. Mari-Fr. Begoc, Landunvez ; 2. Jeanne Loaec, Plougerne ; 3. Loeiz ar Gall, ar Grouaneg ; 4. Olivier Kervella, Plougastell.

Tresadennoù (dessins) : Solange Gouez, Gwiseny ; Annig Lamour, Lokournan-Leon ; Odette Herry, Landunvez ; Jean J. Muzellec, Plougastell.

Elliant.

Kana (re vihan) : Brigitte Tanguy, Elliant, ha Jean-Noel Touz, Elliant.

(Re grenn) : Jeannine Mévellec, Coray, ha Joel Queau, Brieg.

(Re vraz) : Anjela Guillou, Elliant, ha Noel Dan'el, Brieg.

Displega (re vihan) : Marguerite Montfort, Elliant.

(Re grenn) : Mari-Joza Le Meur, Elliant, ha Joel Quéau, Brieg.

(Re vraz) : Anjela Guillou, Elliant, ha Jean-Claude Senechal, Kerfeunteun.

Strolladoù kana — 1. Elliant (merhed braz). — 2. Sant-Yvi (merhed vraz). — 3. Sant-Yvi (m. bihan). — 4. Elliant (m. krenn). — 5. Elliant (m. bihan). — 6. Elliant (paolred vihan). — 7. Elliant (p. krenn).

Tresadennoù (dessins) : Joelle Loussouarn, Saint-Yvi ; Etiennelette Le Roy, Elliant ; Mari J. Le Berre, Sant Yvi ; Bernard Donnard, Kerfeunteun.

Kan-pobl — 1. Ernest Peron hag e verh, Karaez ; 2. Jacqueline Guillerme, Karaez ; Petronille Le Roy, Elliant ; Itron Hervieu hag Itron Hebrél, Motreff.

Langonned.

Kana : Mari-L. Le Corff, Plouay ; Chantal Doujet, Lignol ; Mari-Tereza Le Leannec, Lignol ; Georges Gargam, Josselin.

Displega : Mari-Louiza Le Roux, Langonned ; Chantal Doujet, Lignol ; Joziane Le Bozec, Langonned.

Tresa (dcssin) : Jean-J. Jaffre, Plouay ; Anna-Mari Chevillard, Guenin ; Lucia Perron, Bignan ; Mari-Tereza Malardé, Conleau.

Lazou-kana (2 vouez) : 1. Lokminé (merhed) ; 2. Ar Faoued (merhed).

(3 mouez) : 1. Trussac (merhed) ; 2. Pont-ivy (Le Château).

(3 mouez disheñvel) : 1. Lanvénege ; 2. Etel ; 3. Pluvigner.

(4 mouez) : 1. Trussac Gwened.

An darvuia euz ar vugale a zo bet o konkouri o-deus bet prizioù, diwar goust Emgleo-Breiz, diêz eo lavared evid peseurt talvoudegez ; a dra-zur evid ouspenn 300.000 lur, en eur gonta peb tra : merhodennou, tavancherou, foularioù, priachou Kemper, ha da heul, eur bern levrioù brezoneg.

E Lanniltz hag e Ploueskad, el leh m'on eus bet Bleun-Brugou skol da zibab ar re walla da vond da Plougastell, on-eus ive roet e-leiz a brizioù d'ar re genta euz peb skol : (29 skol).

Skritellou brezoneg Langonned laket-war an tiez da genver ar Bleun-Brug

Ma Zi Bihan.

Miles Ravalec.

Ar Butun, ar Gwin, ar Hafé
Zo mad ba ti Marie Renée.

Marie-Renée.

Arlerh frouez doh ti Lideg
Oll an dud a lip o beg.

Joseph Lidec.

Kig ha Kafé ha Ludu
A zo en Abati Zu.

Jean Ravallec.

Ne drémenet ket dirag ti Marie Jolie
Hep monet d'hi zaludi.

René Sollicec.

Oll en traou doh ti Quiniaou
A zo mad hag a garg ar bolaou

(bouzellou).
Yves Quinto.

Kendalhet bepred
Feiz on tud kouz.

Mlle Boropert.

Koëfou mod ar Vro
Ba ti Cécile c'hwil a gavo.

Mlle Bizien.

Gwin mad ! Dalhmad !
E ti Katerin
Ema ive an évaj fin !

Louis Le Grand.

Gand an hadaj doh ti Cosperec
Oll ar parkou a ve leun bepred.

Louis Cosperec.

Louzu doh ti Monsallut
A gas ar moh yah doustu.

Pharmacie Monsallut.

Evid kousked mad doh an noz
Amañ kaver traou evid repoz.

Yves Bizien.

Gwisket mad ha paz ré ger
Ba ti Loeiz ar Hémener.

Louis Broustal.

Ba ti « Bébert »
E ve trohet ar bléo bër.

Albert Le Stang.

Frouez fresk korn
Barz an ti Korn.

Louis Trévettin.

Katéo (Kouignou) kras : Ré vraz ré vihan
Tout a ya ba me ruehan (bruched).

Joseph Croizer.

Ar miliner a vala greun
Ken koulz valefen-me ma heun.

Louis Julloux.

Aman doh ar bléo Kri
E ve greit ur gwall hoari !

Mme Julloux.

Ba vosserez ar horn.
E ma ar hig hep askorn.

Henri Cosperec.

Ma vanka doh : Kafé, Katéo, Gwin, Ver-
[mieille]

C'hwil a gavo ba ti Thomas Lannuel.
Thomas Lannuel.

Red éo doh bout dall
Evid paz monet ba ti Broustal.

Joseph Broustal (Boucherie).

Plah yaouank ! mar fot doh kad zao
Aman ema an traou brao.

Maurice Cadic.

Tostét Tudigou latouz
Amañ evidoh a zo krampouz !

Crêperie Scouarnec.

Labourerien douar ! E ti Job Mari Ny
Goarnet mad diouz an Tan, oll ho traou

[hag ho Ti.

Joseph-Marie Le Ny.

Paotr ar Goulou
A gar hoari boulou.

Merhed fin ! laket mui kin
Ar vilin kafé tré ho taoulin.

François Trouboul.

Paotred ha Merhed ! N'it ket war dred
Deit da choaj er Mobyette.

Yves Bériz.

E ti Péron-Poder
Ar choaj, ha traou kaër.

Quincaillerie Péron-Poder.

Diouz e benn beteg e rer
Oll ema mad ba ti Fanch Guéner.

Charcuterie Guéner.

Aman é chom « Mathelin »
Petra e laro doh kin ???

Louis Bizien.

Amañ vé touzet ar goazed
Ha rodillet evid mad ar merhed.

Hag a vo reit deh eur vuredad
A vo leun ivé a c'houéz-vad.

Coiffure Strugeon.

Chann' Poullichet,
Néourez.

Yve Poullichet, Poullanet.

Barbon Floc'h.
Kemenérez.

Barmon Floc'h.

Skol-hañv ar Bleun-Brug

e Ker-Stears Brest 24 - 29 a viz Eost

Kalz berz e-neus bet greet adarre, skol-hañv ar Bleun-Brug, e Brest-Kerstears, euz ar 24 d'an 29 a viz Eost.

Digoret eo bet d'ar 24 da 14 h. 30, dre brezegenn an Ao. Jean Le Duigou : « Face à l'uniformisation ».

Renet eo bet an devez kenta gand an Aotrou'n Eskob Fave, e-unan, a brezantas ar prezeger hag a lavaras eun nebeud komzou evid kloza.

Eno edo ive, an Ao. Chaloni Prigent, rener an deskadurez en eskopti, an Ao. Chaloni ar Ster, bet ensellour haz iz-rener an deskadurez, an Ao. Chaloni Falc'hun, an Ao. Chaloni Mevellec, nevez anvet aluzenner leanezed ar Retred, e Kemperle, an Ao. Job Seite, aluzenner Bleun-Brug Leon, an Ao. Chaloni Cabon, rener skolaj Charles de Foucauld, an Ao. Bleunven, person Lokournan ha rener ar gelaouenn Bleun-Brug, an Aotrounez beleien Blons, Boussard ha Calvarin euz oberou kristen an eskopti, an Ao. Bihan, person Plougastell ha bet aluzenner-meur ar Bleun-Brug, an Tad Chardronnet, aluzenner Skouted Bleimor, an Ao. de Guebriant prezidant ar Gambr a labourerez-douar, an Doktor Dujardin hag e bried, rener Bleun-Brug Leon, an Ao. Cormerais, kelenner e Roazon, hag e bried...

E-doug ar skol-hañv ez eus bet deuet c'hoaz eun nebeud pennadureziou all, evel an Ao. Trebaol, iz-mêr, deuet en ano mêr Brest ; an Ao. de la Galanderie kelenner e « Institut Catholique Paris » ; an Ao. Mocaer, rener Kendalc'h hag Emgleo-Breiz hag iz-rener ar Bleun-Brug ; an Aotrounez Jacq ha Belheoc'h euz an Office-Central, Landerne ; an Ao. Grall, rener-skol Lokournan-Leon ; ar holonel Jestin euz Brest ; an Ao. Kermorgant teñzorier komite B. B. Leon ; an Ao. hag an Intron Jeannes ; Yann Potin...

Red eo konta ouspenn, ar re o-deus bet prezenonou da ober :

An aotrounez beleien : Colleau, tad speredel ar skol-hañv, Bourdellès, kelenner e Lannuon, Abjean, rener kanerien Bro-Leon, hag an Tad Gregoire euz Landevenneg. — An aotrounez Henri Queffelec, skrivagner brudet, Ollivro, kelenner e Gwengamp ha skrivagner, Abasq, kelenner er skol-naval, Brisson, kelenner e Plougastell, Tricoire doktor e Kastelbriant, hag e bried, J.-M. Guilcher euz ar C.N.R.S. hag e bried, Georges Merdy euz Douarnenez, Yann ar Minor hag e bried euz Pont'n-Abad, Omnès, kelenner er skol-naval, Michel hag e bried, tisavour e Fouesnant, Jos an Doare, luhskeudenner e Kastellin, hag ar Frered Seite, Riou, Danielou ha Cyprien-Joseph. An Ao. Yeun ar Gow, hag ar Frer Uguen, siwaz ! a zo bet miret da zond en abeg d'o yehed. An Ao. Martray, sekretour-meur ar C.E.L.I.B., a zo bet ive miret da zond gand eur veaj er vro-estren.

War-dro 85 a zo bet ingal o heulia an oll brezenonou. E darn euz ar prezenonou on eus kontet 130. En eur gonta ar re oll on-eus gellet anaoud on-eus 151. Ha ma konter ar re-all ha n'on-eus ket anavezet, e heller lavared ez eus bet war-dro 200 o tarempredi skol-hañv Brest. En o zouez e konter 43 leanez (Kermaria, Spered-Santel, Sant-Meven, Krehen, Fransiskanezed, Retred). Merhed all : 19. Frered : 26 (Ploermel, La Salle, Sant-Gabriel) ; kelennerien : 11. Ar re all a oa beleien ha siviled a beb oad.

An oll a zo eet kuit laouen braz, digor o spered hag o halon da Vreiz ha d'he hudennou.

**

Ober eun danevell penn-da-benn, euz skol-hañv ar Bleun-Brug, e Brèst, n'eo ket eun dra ken eñ-se.

Bez ez eus bet grêt 31 prezegenn a eun eur pe eun eur hanter pep hini, war danvezioù a bep seurt, ken pouezuz an eil hag egile.

Buhez ha skridoù Mikael an Noblez, displeget gand an aotrou *Colleau* kure e Plou-vien, eo bet boued spereidel on eneoù, bep mintin, a-raog an overenn. Skweriuz eo bet evidom gwelad penaoz, an Tad Mikael, e-neus kaset da benn e labour santel, en desped d'e amzer ha d'an dud. Hadet e-neus er joa a-wechou, med dreist-oll er boan hag en anken, ha frouez e labour, a-dreuz ar hantvejoù, dre ar misionou, a zo deuet betek annom, dre ma oa diazezet war Doue dre ar bedenn hag ar binijenn.

Ar brezoneg, evel-just, e-neus bet eur plas frank er skol-hañv, rag, gand an *Ao. Perrot* e lavarom atao : « Hep brezoneg n'eus Breiz ebed ». Kanet eo bet ar pedennou, mintin ha noz e brezoneg, iennet eo bet pedennou an overenn e brezoneg, kanet on-eus or hantlikou kaerra hag or hanaouennou.

Bep mintin, da nav eur hanter, ez eus bet grêt eur gentel vrezoneg diwar pennadoù lennegezh gand an aotrounez *Falc'hun*, *Brisson* ha *Job Seite*, pennadoù dibabet e skridoù *Malmanche* (Gurvan), *Mab an Dig* (Kizier noz Sant Pabu) ha *Guillou*. — Ar *Frer Riou* a zisplegas pinvidigezh ar verb e brezoneg, hag an *D^r Tricou* a rias da glevet kentelioù e levr deski brezoneg, nevez laket gantañ war disk.

Diwarbenn ar yez c'hoaz, on-eus bet eur brezegenn gaer gand an Aotrou *Abasq*, kelenner er Skol naval. On laket e-neus da anavezout peurlvad Tanguy *Malmanche* hag e oberenn veur « Gurvan ar Marheg estrañjour ». Eun oberenn souezuz, e gwirionez, med a gompren gwellou pa anavezet an oberour. Pegen lampr, pegen pinvidig, avad, e yez. Pegen kaer e son e werzennoù !... Pep hini e-neus kaset gantañ an oberenn, nevez moulet gand Emgleo Breiz, en eul levrig kaer, da helloud e studia pisol.

Gand an *Ao. Abjean*, rener « Kanerien Bro-Leon » on-eus studiet talvoudegezh or hanaouennou pobl hag o orin. Bez ez eus en o zouez sonioù kaer a dalvez beza desket er skol d'or bugale. Na pegen diboeil ar vistri a ra fae war eur seurt teñzor.

Diou studiadennoù bouezuz an *Ao. J.-M. Guilcher* ken gouiziezh ha m'eo hegarad, on laka da dañva sonioù ar Manez savet evit dañsal hag a glever bremañ ken aliez en abadennoù « Kan ha Diskan ». Red eo beza klevet an *Ao. Guilcher* evid kompren talvoudegezh dibar an tonioù-se eun ha pinvidig er memez amzer. Med na pegen distagallet e ranker beza evid o hana ervad, ha war ar vicher-mañ, n'eus ket par ken nebeud d'an *Ao. Guilcher*.

N'eo ket a-walh kana. Réd eo ivez c'hoari. Sevel war al leur-hoari eo bet e-doug ar wech, plijadur vraz ar Vretoned. Ar « Misterioù » koz a zo bet c'hoariet betek ar hantved-mañ dirag eur mor a dud. Pezioù-c'hoari an *ao. Bayon* ha *ao. Perrot* a zo bet c'hoariet dre oll. Abadennoù-meur ar Bleun-Brug a zàch atao selaouerien a vernioù. *G. Merdy*, euz Douarnenez, e-neus diskouezet deom pegen eñ e ve displega gand c'hoari-erien pennadoù euz ar Barzaz-Breiz, pe kontadennoù koz or bro. Netra plijusoh evid ar vugale na zoken evid ar re vraz.

Ha pa gomzer euz kontadennoù ema ar mare da venegi amañ prezegenn an *ao. Omnes*, kelenner er Skol-Naval, war an dud varzuz ha diaouleg a gaver er hontadennoù koz e Breiz. Bez e kaver ar ramzed, ar hornandoned, ar youdiged, ar morverhed, ...ha *Paul Gornieg*, pe *Satan goz*. C'hoarzin ha skrijal on-eus greet a beb eil, o selaou an istorioù-se. Ha bez 'e heller o honta d'ar vugale ? Ya, gand ma vezo taolet evez da jom heb o sponta ha ma vo greet an diskleriadurioù red evid ma raint atao vad d'o eneoù.

Kudenn glaharuz al labour-douar hag an divroa e Breiz, a zo bet displeget gand kalz a ampartiz hag a ouiziegezh e peder brezegenn helavar meurbed. Ar genta, greet gand an *Ao. de Guebriant*, rener ar gambr a labour-douar, a ziskouezas petra ne vije ket tennet euz douar Breiz ma vije ar gouerien sikouret ha kelennet evel m'eo d'ecet gand gouarnamant ar vro (1).

An *Ao. Bourdellès*, kelenner e skolaj Lannuon, e diou brezegenn leun a galon hag a garantez-vro, a bouezas war an hevelep kudenn. Ne vo savet Breiz, nemed pa felio d'ar re yaouank ha pa vo roet galloud dezo da jom er vro.

Ar spereid eo a zo klañv, eme an *Ao. Ollivro*, skrivagner ha kelenner e Gwengamp, en eur brezegenn fromuz kenañ, a reas d'an daelou redeg meur a wech war jodou ar zelaouerien. N'eo ket a-walh rei eñ amanchou d'an dud, red eo da genta diframma an dizesper euz o halon, rei fizians ha feiz dezo en amzer da zond, kroui labour evito en o bro el leh o has da vernia er herioù braz. Deskom d'or bugale n'eo ket klask o 'lijadur, redeg war-lerc'h ar zituasion vraz ha dibreder, med en em rei, gouzañv ha

labourad. Hag evid ma savo frouez war on abostolèrez, lakom Doue a du ganeom dre ar bedenn hag ar binijenn... Eur feiz da zibrada menezioù, setu petra eo bet evidom prezegenn an *Ao. Ollivro*. M'e-neus dizoloet deom eur gouli euzuz, e-neus ivez diskouezet al louzoù d'e barea evel m'e-neus greet e-unan e Bro Wengamp ha Lannuon, gand skoazell an *Ao. Bourdellès* hag eur bern mignoned.

An *Ao. Chaloni Mevelleg* (nevez anvet da aluzenner meur ar Bleun-Brug), dre ar skiant-prena gounezet-gantañ e-touez Bretoned ar Hreisteiz, a roas c'hoaz muiou a bouez d'ar peder brezegenn-mañ, en eur zisplega eun nebeud testenioù dastumet gantañ du-hont e doug 25 bloaz a abostolèrez. Digemeret em-eus bernioù Bretoned divroet, emezañ, med n'eo ket me eo am bije bet o a'let da guitaad o bro. Va lezit, avad, da lavared deoh pegen doaniet e vez an dud-mañ pa z'gouez ganto distrei d'o Breiz, pa welont bro o havel ken divrezoneget.

An *Arzou Kaer*, kennebeud, n'int ket bet ankounac'heet e-pad ar skol-hañv. Digant an *Ao. Henri Queffelec*, skrivagner brudet, on-eus bet eur brezegenn lennegel e-leiz enni a varzonezh hag a zudi. Taolennet e-neus d'razom kaerderioù Breiz en he zud, en he zavadiurioù, en he hornioù bro. Gouennet e-neus diganeom douja kaerder an natur evel eun elfenn euz kaerder Doue, miret a-hed ar mor hag e-kreiz an douarou, enezennoù a zioulder hag a beoh a ra hirio kement a ziouer d'ar bed paour.

Gand an *Ao. Michel*, architekt, ha *Jos an Doare* euz Kastellin, e welom petra e tiefe beza d'an den al leh m'ema ennañ o chom : an diazez euz e strusted er bed-mañ, da hortoz dudi peurlvaduz ar bed-all. Bernia tud e tiez braz divent hep liorz na porz, pebez tra dinatur mad da z'rolla ar spereioù ha da vouga an eneoù. Savom labouradegoù krenn a vo en-dro dezo tiez glazeret ha bleuniet, el leh ma kavo an den dudi da garga e amzer vag en eur ober labourioù plijuz pe gand e zorn pe gand e spereid. Evel-se eo e vo dalhet diouz an tavarrioù hag an tiez louz, hag on devo eur bobl yah ha seven gand eun ene dezi he-unan.

Daoust ha n'eo ket ar wirionezh-se eo e-neus ive an *Ao. Duigou* desket deom gand e brezegenn diger ar Skol-hañv ? Stourm onz an hevelebekead. Pa vezo an oll dud heñvel buhez, euz Brest da Vladivostok, daoust hag e vo bravoh ar béd ? Pa vo diskaret e Breiz, kement braventez a zo enni, daoust hag e vo bravoh Bro-C'hall ? Pa gollo ar Breizad perz'ou dibar e ene, evid kemer marteze siou an estren a fell dezañ trevez, daoust hag e-nevo muiou a dalvouddegezh ? Bevom en on amzer gand oll berzioù mad on Tadou. Ne vezim ket bihannoh ma talhom d'ar brezoneg. Euz on tiez hag on arreburi koz, tennom on awen evid sevel on tiez hag on arreburi modern. Ma ne zougom ket dilhad on Tadou-koz evel m'edont, gouezom en em vataad anezo evid kroui or gwiskamanchou a hirio...

Ha setu hag on laka da zonjal en dilhajoù kaer krouet gand tiez, evel ti vinored, e Pont-n-Abad, ha bet diskouezet deom, er Skol-hañv, gand *Yann ar Minor*. Pebez levezon d'rag kemend-all a zilhajoù kaer ! : gwiskamanchou gwazed, merhed dreist-oll, bugale... hag ive dilhajoù evid al lidou sakr. Réd eo gwelad evid kredi. Setu eun nevezenti plijaduruz ; ar vuhez o kenderhel a héd an awen vreizad, o strinka, kentoh, kaerroh eged biskoaz.

Eur bajenn gaer euz istor tri vanati, e Breiz, eo a glevom gand an *Tad Gregoire* a Landevenneg, tri vanati bet savet endro da blég mor Brest : Sant Vaze-Penn-ar-Réd, Daoulas ha Landevenneg. Ar henta n'eo mui h'irio nemed dismañtroù hag a-zloh dezo eun tour-tan o strinka sklerijenn en noz du. An daou all a zo adarre oh adveza. Daoulas, dre hras ar Fransiskanez a zo deuet da veza eur skol paotrezed, ha Landevenneg dre labour an Tadou Benediktined ha skoazell Breiz a-bez, a zo adarre eun abati kaerroh eged n'eo bet biskoaz. Bez eo ive eul levraoueg, an talvoudusa a zo hirio e Breiz, digor d'an neb a gar, gwazed ha merhed. Eno e renko tremen, komend hini a 'fello dezañ kaoud eur « hultur » breizeg e gwirionez.

An *Ao. Cormerais*, kelenner e Roazon, e-neus d'skouezet deom peseurt kemm a zo, eñ kaoud « kultur » ha kaoud d'blomou. Ne vezont ket atao, an eil o vond gand egile. N'eus bet morse muiou a ziplomoù eged en amzer-mañ. N'heller ket lavared avad eo eet kemend-all ar « hultur » war-raog.

Gand *Yeun ar Gow* on-nije bet klevet ano euz ar maro e Breiz. Siwaz, avad, e yehed a viras outañ da zond betek Brest, hag oll on-eus bet kerse.

An *D^r Dujardin* en devo tro, evel-se, d'ober deom diou brezegenn a zesko deom eur bern traou. Ar Furcher koz a gendall da veza ken ampart war e vicher. Diskouezet e-neus deom e peleh kavoud paperioù koz eur barrez, penaoz o digeri, penaoz o lenn evid tenna diouto peadra da zavel eun istor plijuz ha kentelioù. Méd an dra plijusa e-neus bet da lavared deom, eo ar gavadenn souezuz e-neus nevez greet er « Colomb'e ». Ya, eet eo e fri-furch betek keid-se. Amañ, avad, n'em-eus konje ebed da lavared, evid c'hoaz, petra e-neus dizoloet. Heñ, e-unan, han lavaro deoh a-raog pell, hag e vezoh souezet kement ha m'om-ni bet.

An *Ao. Per Mokaer*, rener « Emgleo-Breiz » ha « Kendalh », hag Iz-rener ar Bleun-Brug, eo a glozo ar Skol-hañv. Lakaad a ra keñver ha keñver diou vro : Kembre ha

(2) Prezegenn an *ao. de Guebriant* a zo bet roneoskrivet. Bez' e heller he goulenn diganeom.

Breiz, hag a zo c'hoar an eil d'ebén. Breudeur eo Kembreiz d'ar Vretoned. Kembreiz avad a zo l'orh enno gand o yez, a blij dezo he deski hag he homz e pep leh. Ar Vretoned, e keit-se, n'o deus gand o brezoneg nemed méz, a zo fae ganto e zeski hag e gomz d'o bugale ; a zo prest da labeza ar re o-deus gouestlet dezañ o buhez. Gouarnamant Bro-Zaoz a zigor frank dor ar Skoliou d'ar hembraeg, a ra pep tra evid ma vo desket gand oll vugale ar vro. Gouarnamant Bro-Hall, e-keit-se, a zo en he gwir wella o vouga ar brezoneg er skoliou hag e pep leh... Pebez truez ha pebez mez !! Méd deom-ni kelennerien eo da jeñch penn d'ar vaz. Henn ober a raim ma karom.

Ar stlakadeg daouarn a zeu da heul, a ziskouez d'an Ao. Mokaer, n'eo ket bolontez vad eo a vank.

Warlerh e vo lennet eur mennad da houlenn ma vo laket ar brezoneg er bap'hot e-giz eil yez, mennad hag a zo kavet mad gand an oll.

Echu eo skol hañv 1959. An Ao. Visant Sette, he diazezour hag he rener a ro neuze da houzoud e vo skol-hañv 1960 e Gwengamp, hag a houlenn digand pep h'ni labourad evid ma vo du-hont, e doug sizun ziweza miz eost, muioh c'hoaz a dud egéd e Brest.

Ra vezo trugareket leanezed Kersteers o-deus on digemeret kenkoulz.

Bennoz Doue ive d'ar re oll o-deus labourad da zevel Skol-hañv Brest, hep ankou-nac'haad ar Frered Riou, Herve Danielou ha Cyprien, danevellourien ar skol, an Ao. Mallegol, a roas kentellou binioh, hag Yves al Louz, sekretour ha teñzorier.

Edoneno.



Le problème du Breton à l'école et aux examens :

Une protestation justifiée des Mouvements Folkloriques et Culturels

Nous avons dit et commenté la semaine dernière la manifestation qui, à l'issue du Festival des Cornemuses à Brest, s'est déroulée en faveur de l'enseignement du breton à l'école et du maintien d'une épreuve (facultative) de breton à l'oral du baccalauréat.

Depuis, nous avons reçu de l'un des groupes celtiques d'une part, de l'Association « Bogadeg ar Sonerien » d'autre part, deux motions de protestation contre le sort actuellement fait au breton. Voici l'une de ces motions, celle de « Bogadeg ar Sonerien » :

« Les 2.500 délégués de « Bogadeg ar Sonerien », réunis à Brest les 31 Juillet, 1^{er} et 2 Août 1959, à l'occasion du 7^e Festival International des Cornemuses, prennent acte de la mesure récemment prise par le Ministre de l'Education Nationale et qui a pour effet de réduire à néant l'enseignement du Breton.

Ainsi, une simple décision de Ministre, conseillé par des Services qui n'ont jamais perdu une occasion de marquer leur hostilité à la langue parlée par un million de citoyens français, aura suffi pour frustrer les Bretons d'un avantage purement symbolique sans doute, mais inscrit dans une loi votée à l'unanimité du Parlement.

Profondément humiliés par cette mesure vexatoire, ils constatent avec écœurement que les insignifiantes concessions et les vagues promesses faites aux Bretons, après d'innombrables vœux et démarches de leurs corps constitués et de leurs associations culturelles, n'avaient pour but que de les leurrer, une fois de plus.

Aussi se déclarent-ils entièrement d'accord avec M. le Président Pléven lorsqu'il dit qu'« en ce qui concerne la Bretagne, le cœur de l'Etat n'y est pas », et ils ajoutent qu'il n'y a jamais été.

Ils sont reconnaissants à leur parlementaires de tenter cependant une ultime démarche : ils attendent les résultats de celle-ci, prêts à en tirer toutes les conséquences. »

MOTION

Le Stage d'enseignants, organisé sous l'égide du Bleun-Brug, société culturelle bretonne catholique, stage réunissant à Brest plus de 100 représentants des divers ordres d'enseignement privé provenant des trois départements bretonnants,

— en union avec les autres organisations culturelles bretonnes, basques, catalanes et occitanes ;

— Proteste contre la suppression de l'épreuve facultative de langue régionale au baccalauréat, suppression par simple décret d'un article de loi votée par l'unanimité des représentants du peuple ;

— Demande que l'Education Nationale donne — suivant le désir même de M. le Ministre, — des preuves de sa volonté de faire progresser réellement l'enseignement des langues de France et que, dans ce but, elle appuie entièrement les projets de loi Crouan et Bayou prévoyant un enseignement organisé et rentable de ces langues ;

— Félicite MM. les Parlementaires bretons et occitans de leur ténacité à vouloir faire aboutir enfin une réforme que la France est un des rares pays à n'avoir point encore accompli,

— mais leur demande instamment de rester énergiques et persévérants dans cette entreprise de sauvegarde de nos cultures régionales et langues de France, patrimoine valable de toute la Communauté.

(Motion adoptée à l'issue du Stage des Enseignants, tenu à la Retraite de Kers-Stears, Brest, du 24 au 29 Août 1959.)



Ar verienenn

Eur verienenn a veve
en eun toullig er glaster.
Eur gelienenn 'n he heñver
he-doa savet he leve.

Petra ' ra
Ar verienenn goude ?
Gervel, en an ' Doue
ha... mervel.

Eun devez, ar verienenn
a gouezas 'n eur poull dour,
eno e-kichenn.
Hag e halvas ar gelienenn
war he zikour.

Petra ' raje kén
heb sikour dén !

— Mignonez, emezi,
taolit din eur yeotennig.
Emaon el lennig
o veuzi.

Da zavetei or yéz karet
e-kreiz an dour beuz,
eur blouzenn on-eus goulennet.
Ne vo ket greet an neuze
na d'or selaou na d'or hleved.
En ano al lealded,
an divrech a jom kroazet,
hag e lezer heb heugi
an amezeg da veuzi.

— Ne garfen ket koll ho puez,
Hag ouzoh em-eus truez,
eme ar gelienenn.
Méd en ano ar 'frankiz,
honnez eo va lezenn,
N'hellen evidoh e neb giz
netra.

V. S.

keleier

Troveni vraz Lokronan.

Ha bet oh e Troveni vraz Lokronan e miz Gouere diweza ? Ma ne 'z oh ket ho-peus kollet kalz hag ho pedan stard da vond, a-benn c'hweh vloaz amañ, rag ne vez greet nemed beb 6 vloaz.

Mar deo eur b'nienn ober an droveni (trizeg kilometr vale a zo) eo ive eun dudi, dreist-oll pa vez brao an amzer evel er bloaz mañ. Dirag taolennou kaer an natur, eo ez pedi ha kana, pe en heñchoù don gwasketet a blaster, pe e touez al lann, an drez, ar brug hag ar raden, ppe war gern ar menez gand ar mor braz dirazor.

Med, n'it ket d'an Droveni evid genaouegi ouz an dougerien kroaziou ha bannielou, evel ma ra kalz re a dud. It evid heulia ar broses on, evid ober pinijenn, evid kana ha pedi, evel m'o deus bet greet on Tadou, e-doug ar wech. Ma rit evelse, bezit sur, n'ho-pezo ket a geuz, tamm ebed.

Neventi vad d'ar Vretoned !

Or mignon an D^r Tricoire e-neus savet eun disk da zeski brezoneg. Laket e neus war eur bladenn an hanter euz e levrig : « Komzom, lennom ha skrivom brezoneg », displeget ken brao gand Loeiz Roparz euz Poullaouen, Yann ar Moulin euz Pleiben, hag Annaig Kastell euz Sp'ed, oll evel just, brezonegerien vad, bet desket ganto ar brezoneg war barlenn o mamm.

A-raoz eo e-neus an D^r Tricoire dibabet displegerien evid e bladenn euz kreizenn Breiz-Iz. Eun doare distaga eo, ez-tre da gompren e Leon, Treger ha Kerne, ha zoken Gwened-Izel.

An disk a zo e gwerz e ti an D^r Tricoire, rue du Couëré, Châteaubriand, L. A., evid 1.500 lur gand ar mizou kas ouspenn. (Disque microsillon, 33 tours.)

Alliet stard eo on lennerien da brena an disk-se. Ma vez gwerzet mad, e teuo re all war e lerh.

Eureujou.

Or Mignon *Per Moulin* euz Kastellin, ezel euz komite Bleun-Brug Kerne, ha bet sekretour komite Bleun-Brug Kastellin e 1953, a zo bet dimezet gand Henriette Bosson euz Kastellin, e iliz Sant-Idunet e Kastellin, d'ar 5 a viz Gwengolo.

Or Mignon *Yann Pelliet* euz Kemper, ezel euz komite Bleun-Brug Kerne a zo bet dimezet gand Denise Prigent euz kelh keltieg ar Hastell-Nevez-ar-Faou, d'an 9 a viz Gwengolo.

Ra gouezo warno oll, bennoz Doue ha Sent Breiz ma vezo eüruz o buhez ha frouezuz o dimezi.

Kanvou.

D'ar 17, a viz Eost diweza, eo marvet, d'an oad a 84 bloaz, e ti ar veleien goz, e Kastel, an Ao. *Casimir Deniel*, bet kure, ha person, e Breléz, epad tost da 50 vloaz.

Unan eo bet euz ar veleien o deus komprenet ar gwella talvoudegez ar patronachou, er parrezioù, diwar ar mēz, komprenet ive eo an teatr breton, eur benveg dispar, eur gador brezeg, euz ar re wella, evid ober vad ha plijadur d'ar bobl.

Ep ad hir vloaveziou e-neus laket displega, dirag kanchou a dud, an oll beziou c'hoari brezoneg, anavezet en e amzer. En e barrez vihan, e kavas hag e kentellias c'hoarierien ha kanerien, euz an dibab, a oa eun dudi e hleved...

Ar brezelioù milliget, oa boaz da lavared, o deus troet sperejou ar Vretoned, ha mouget, en o halon, mouez ar gwad hag ar ouenn...

Mignon braz oa d'an ao. Perrot, hag euz ar memez oajou gantañ.

Beteg e huanad diweza eo bet eul lenner feal da « Vleun-Brug ».

E gorv a zo beziet er Vourh-Wenn, parrez e gavell.

Ra vezo I. V. Vrelez, e neus kement enoret, laouen ouz e ene !

Lenet war "LA CROIX" (5-9-59)

La langue basque au programme des écoles libres du diocèse de Bayonne.

Avec l'approbation de Son Exc. Mgr Gouyon, évêque de Bayonne, la direction diocésaine de l'Enseignement a décidé l'enseignement de la langue basque dans les écoles chrétiennes, primaires et secondaires, du pays basque.

Dans les Séminaires, les aspirants au sacerdoce recevront obligatoirement un enseignement de cette langue pendant toute la durée de leurs études. »

Setu eur helou mad evid or migoned eur bro Euskadi. E niverenn ziweza B. B. ho-peus lennet amañ eul lizer digand ar Chaloni Lafitte, eur kloerdi Ustarits, unan euz ar re o-deus labouret ar muia vid skigna ha divenn an euskareg.

E Breiz-Izel, ive, abaoe pell' zo, eo ordrenet deski ar brezoneg ar skolioù kristen. Siwaz !!! avad ! pet skol a zo o senti ? E peb Lycée e vez roet kente-liou brezoneg. Hag er skolachou kristen petra ' reer ?

Deveziou-studi Lannuon.

Mall eo sevet labouradegoù e Breiz, evid mired ouz or yacuankizou da vond er-mēz euz ar Vro.

Evid studia ar hudennou-se, ez eus bet e Lannuon daou zevez-studi, d'an 29 ha d'an 30 a viz Eost, renet gand an Aotrou Ollivro. Prezegerien vad a zo bet klevet, evel an Aotrounez Martray, sekretour-meur ar C.E.L.I.B., Sidaner, Ropers, Charles, Cozannet, Plunier, Tual, Petit, François-Xavier Hutin, an Aotrounez beleien Gauthier ha Bourdellès, hag an Tad Lebrez.

An Ao. Edouard Ollivro, en eur gloza an daou zevez studi, a lavaras e oa bet eun taol-esa deuet da vad. Heuliet eo bet ar studiadegoù gand 130 a dud. — Eun dra da veza kendallhet.

Ra zavo e Breiz strolladou niveruz evel hini Lannuon-Gwengamp. Ema an dud-mañ, renet gand eun dén a benn, a galon hag a feiz, evel an Ao. Ollivro, war an hent a zigaso deom ar zilvidigez. Mad e ve distrei war prezegennou ken talvouduz.

Skol dre lizer ar Bleun-Brug.

Gand ar skolioù o tigeri, e reom eur galv adarre evid or skol dre lizer. Heuilhit or skol, pe klaskit tud d'he heulia. He brudit en-dro deoh. Goulennit diganeom paperioù evid-se. Da beb hini eo labourad da glask deom skolidi. — *Skrivit da Visant Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finistère.*

Er bloaz-skol tremenet on-eus bet enskrivet 69 skoliad war roll or skol-dre-lizer, a beb oad hag a beb micher.

Gwall geleier.

An Ao. *Abjean*, rener « Kanerien Bro-Leon » e-neus kuiteet Landivizio evid mard da Zant-Vaze Montroulez. Ra vo trugareket amañ, evid an oll zervij e-neus rentet d'ar Bleun-Brug gand e ganerien. En em houlenn a reom avad gand enkreiz ha n'eo ket roet taol ar maro d'eun oberenn vreizeg muioh.

Ar Frer *Herve Danielou*, ezel euz Komite B.-B. Leon, oh ober skol er Groaz-Ruz e Brest, a zo bet anvet da rener Novisiat bihan Kerozer e-kichen Gwened. Kerse a gavom ouz e weled pell diouzom. Bennoz Doue dezan ha gwella gourhemennou.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMPR. CORNOUAILLAISE — C.P.P.P. N° 21697



An dastum sivi e Plougastel

Ton ha son : O. KERVELLA



2

Prest an dud, évet ar rouzig
Dan' digou dig!
Peb hini gand e banerig
Dan' digou dig!
Peb hini gand e banerig
Dan' dig!
A ya laouen dre an heñchou
N'eur gana rimadellou!
Dan' digou digou digou!

3

Dreist an ode beb a lammig
Dan' digou dig!
'Vel alumennou er bilig
Dan' dig!
Ha goude nebeud pedennou
Setu beh war an añchou
Dan' digou digou digou!

4

Dindan o deliou reuzeudig
Dan' digou dig!
Ar sivi deus doare braoig
Dan' dig!
Lugerni 'reont 'vel tanigou
War gandelour o lostou
Dan' digou digou digou!

5

Al labour a ya goustadig
Dan' digou dig!
Ha war ar choukou tanoig
Dan' dig!
An héol flemmuz a ra pokou
A losko pell o roudou!
Dan' digou digou digou!

6

Da greisteiz pa deu ar plahig
Dan' digou dig!
Da lared eo prest al lipig
Dan' dig!
Kaver gras astenn ar memprou
N'eur zamma ar « hajoïou »!
Dan' digou digou digou!

7

Soubenn ar rouz, ragot, silzig
Dan' digou dig!
Fars gwiniz du a zo, ha kig
Dan' dig!
Ha n'eur rinsa ar gwerennou
Vez évet « d'ar yehedou »!
Dan' digou digou digou!

8

D'an abardaëz, labour tennig
Dan' digou dig!
A skuiz an dud eur pennadig
Dan' dig!
Mez an noz fresk war ar mêziou
A zistenn 'vel mogedou!
Dan' digou digou digou!

9

Dastumet eo ar frouëzig
Dan' digou dig!
Evid ma teuim pinvidig
Dan' dig!
Meulom krouer an oll vadou
Ha kerzom en on « lochou »!
Dan' digou digou digou!

O. Kervella,

e koun euz Bleun-Brug Plougastell.